

# Ti Post Bear izili Ai'ta! skarzhet manu militari

**E-pad ar goañv e vez trist an dud alies. Imoret fall ha drouk e c'hallont bezañ gwech an amzer ouzhpenn. Daoust da izili Ai'ta! ha maer Bear, Gérard Le Caer, bezañ goulennet digant renez an ti-post en un doare seven ha pedagogel ha displeget ar bu ha ba dezhi dre ar munut e koulz n'he doa ket homañ degemeret hor yezh pa oa bet dreset he stal a-nevez.**



Archerien o skarzhañ izili Ai'ta ! e-maez burev Post Bear d'ar Sadorn 19 a viz Genver. sk. © Yann-Loeiz Kabell

**e** vit izili dregeriat Ai'ta! e oa arru poent diskouez da renez burev Post Bear d'ar Sadorn 19 a viz Genver pegen displijet e oant gant hec'h emzalc'h. Gant doare fentus boas ar strollad Ai'ta! e oa bet kinniget un tamm abadenn evit degemer pratikoù an ti-post e brezhoneg ha diskouezet d'an holl pegen aes eo staliañ an divyezhegezh pa vez ar youl, evel e-barzh hini Karaez [s.o. *Bremañ* niv. 374]. Ne oa ket renez Post Bear evit magañ seurt soñjoù avat hag hi da c'hervel penn surentez ar Post e Breizh da skoazellañ anezhi, ha betek archerien ar vro... e ken kaz.

## AN ARCHERIEN GALVET

Sioul ha laouen e oa kroget an abadenn. Un ugent bennaket a dud a oa deuet daoust d'ar yenijenn. Kaozioù hag un tamm preder a rae o zamm hent e diabarzh hag e diavaez stal, bet publik gwechall gozh. A-daoltrumm o deus dibabet pennoù-bras ar boutikl serriñ pep tra. Gwir eo e oa daou archer en diabarzh dija, unan anezhe o c'hervel ar peurrest eus ar gwarnizon dre bellgomz. Daoust d'ar re yaouank chomet en o c'hoazez o klask c'hoari al louarn en diabarzh ez eus deuet un hanter dousennad all a baotred Mari-Robin o soudardiñ al lec'h da vat ha skarzhañ er-maez, hini hag hini,

stourmerien ar brezhoneg. Ha serret ar stal e-tro 11 eur 25, a-raok ar c'houlz. Gwazh a se evit ar plac'h hag he doa ezhomm da gaout un tamm arc'hant evit an dibennsizhun pe evit ar vamm-gozh a oa pres warni da gas ur pakad d'he bugale e Pariz. Galleg eo ar yezh nemeti e ti-post Bear war a seblant.

An abadenn gentañ gant tud Ai'ta! e Post Bear e oa aze moarvat. Muic'h a dud a c'hallo kemer perzh pa deuo an nevezamzer sur a-walc'h. Penaos kompren e c'hallfe lod eus bugale Bear deskiñ brezhoneg er vagouri, er skol hag er skolaj a-benn nebeud, en un doare plaen ha seder pa welont e vez nac'het ober gantañ en o zi-post ?

Yann-Loeiz Kabell

## Evit ur chadenn skinwel rannvro

**D'ar Sadorn 9 a viz C'hwevrer** en em vodo Bretoned e Brest, Roazhon ha Naoned evit goulenn e vefe asantet gant Kuzul-rannvro Breizh ha France Télévisions krouiñ ur chadenn skinwel publik e Breizh, tamm-pe-damm diwar batrom Via Stella savet 2006 evit Korsika. Un emglev zo bet etre sindikadoù implijidi France 3 Breizh evit goulenn un digreizennañ donoc'h, peadra da virout ar postoù-labour, ar barregezhioù, ha krouiñ re all ouzhpenn zoken. Ur c'hinnig chadenn rannvro zo bet savet ganto. N'eo ket sklaer evit poent petra a vo votet gant ar guzulierien-rannvro diwar-benn-se. E fin miz C'hwevrer e vo divizet ganto da vat. En em vodañ a raint e Roazhon d'ar Sadorn 9 a viz C'hwevrer, ha galvet o deus izili Ai'ta da sevel chadennadoù tud e Brest, Naoned ha Roazhon, lec'h ma'z eus studioù gant France 3.

Evit gouzout hiroc'h : <http://AI-TA.EU>

**Ur gwir chadenn  
divyezhek  
evit Breizh !**

**diouzhtu!**

**9 a viz C'hwevrer  
Brest - Naoned - Roazhon  
Chadennad tud da 3e dirak France 3**